

KANTIC

ITRON VARIA BENODET



WAR DON : *Itron Varia ar Porzou.*

Itron Varia Benodet,
Sellit ouz ho pugale ;
A beb tu omp deut d'ho kuelest :
Mamm !... En han' Doue true !

1. 'Vit diskuez d'oc'h ho c'harante,
 Hon tud koz, Guerc'hez santel,
 'Roaz ama d'oc'h a leve
 Kaera korn euz Breiz-Izel.

2. Eun dudi ez eo da velet,
 Hoc'h iliz, Mamm dous ha mad,
 Demdostik d'ar mor, uloret,
 En dro dei mantel ar c'hoad.

3. E c'harz he zreid eo dirollet
Ar ster 'vel eur zeizen vras ;
Gant an tarzou steredennet,
Koulz hag en noz anñ oabl glaz.

4. Ennhi n'ho peuz ket ehanet,
Hed korden ar c'hantvejou,
Da rei sikour d'an den poaniet,
Da zelaou he hirvoudou.

5. Morse ne c'helfet niveri
An dud paour bet pareet
Euz an enkreuz, Guerc'hez Vari,
An droug penn, ar boan spered.

6. Evelse beb bla ve gueleet,
Da zul kenta Guengolo,
A bep koste pelerined
O tiredet tro var dro.

7. Ar skeudennou koar digassèt
Ama gant ar glanvourien,
A ziskuez eo bet selaouet
Gant madelez ho feden.
8. Hirio ive, Mamm benniget,
Ni a bromet d'oc'h d'hon tro,
Ne vezo morse dilezet
Hoc'h ilizou en hor bro.
9. En desped d'an dud disakred,
Ato 'nijo ho paniel,
Digailhar, karet, henoret,
A-uz douar Breiz-Izel.
10. Ar c'hrogad vo stard martreze,
An dud fall zo kounaret !
Mez skoazellet gant Mamm Doue,
Biken ne vezimp trec'het !

9/ 11. Ha goude m'hon d'o tremenet
 i/ An draonien-mañ a zaelou,
 Deuit primm d'hon digemeret
 En ho kichen en Envou.

12. Eno, epad an holl amzer,
 Unanet gant Hon Doue,
 Hon levezez 'vo, Mamm dener,
 Diskuez d'oc'h hor c'harante.

Y.L. p...
 ar
 Lavie
 1908

Y. LAVIEC.
 IMPRIMATUR :
 Corisopiti,
 die 14 Novembre 1908.
 A. COGNEAU.
 VIC. GÉN.